

Diwallit, Diwallit Merc'hed !

Son nevez



I

Selaouit kana, iaouankizou
Selaouit mad, c'houi merc'hedigou
Ar zon a zo, evidoc'h, kanet
Diwallit, Diwallit merc'hed !

II

Ar botred iaouank, c'houi oar ervad
Zo kanfarted, ha mad da c'hoapad
Karlz gantho, siouaz, zo bet tromplet
Diwallit, Diwallit merc'hed !

III

Ar botred iaouank a zo ker fin
Ma lavarin d'eoc'h en eur c'hoarzin .
« Va c'halon 'vidoc'h zo e lamet ! »
Diwallit, Diwallit merc'hed !

IV

Lavaret vo great d'eoc'h « Va mestrez !
Pegement ennoc'h me zonzj bemdez ! »
Adreno ho kein, d'eoc'h vezo c'hoarzet
Diwallit, Diwallit merc'hed !

V

Marvailhou kaer a glevoc'h gantho
« Hep dale ganeoc'h me zimezo ! »
Amzer gaer vezo d'eoc'h prometet
Diwallit, Diwallit merc'hed !

VI

Mareat a botred a zo dister
Vez ganeoc'h vit tremen ho amzer
Mar d'oc'h honest e vezoc'h lezet
Diwallit, Diwallit merc'hed !

VII

Kalz anezo, a c'hortoz an noz
Raok kas d'ar gear ho hini goz
Rak sonjou fall vez eu ho spered
Diwallit, Diwallit merc'hed !

VIII

Pa vezit gantho er pardonioù
Vez paet d'eoc'h eur bern madigou
Vit ho teseo, traou deoc'h vez roet
Diwallit, Diwallit merc'hed !

IX

Kalz potred, vez gwelet awechou
O pokad d'eoc'h a gleiz hag a ziou
Gant eur pok, doue zo bet trec'hed
Diwallit, Diwallit merc'hed !

X

Merc'hed digorit ho taoulagad
Lezit ket ar botred da dostaat
Vezer ket pell o veza kollet
Diwallit, Diwallit merc'hed !